



# MIRDI BREIZH



DISKOUENZADEG  
ROAZHON

Adalek an 10 a viz mae betek an 30 aviz here 2011

**Ar Vretoned hag an arc'hant**



**SELLET WAR AL LEC'H**



Gweladennourion ker,

Adkemer a ra al levrig-mañ testennoù an diskouezadeg "Ar vretoned hag an arc'hant"

E-giz-se e c'hellloc'h mont gant an hentad e brezhoneg eus an eil penn d'egile.

An diskouezadeg zo 8 lodenn ennañ:

**1 - Ar pezh a anavezomp diwar-benn ar Vretoned a vremañ dre an arc'hant...**

**2 - Dre ar bed-holl**

**3 - An arc'hant war ar pemdez**

**4 - Kelenn an Espern**

**5 - Diskouez ez eus graet berzh**

**6 - An arc'hant hag ar galloud**

**7 - An arc'hant hag an Iliz**

**8 - Klozadur**

Evit hoc'h hentiñ gant al levrig e Krog pep lodenn gant ur pennad-digeriñ war ur bajenn a liv gwer.

Araok mont kuit, lakait al levrig-se e-barzh ar vouest lec'hiet e dibenn an diskouezadeg marplij ganeoc'h.

Mard oc'h bet plijet gant Ar vretoned hag an arc'hant e brezhoneg, skrivit ur gerig deomp!

Goulennit gant an degemer ar furmskrid ha leunit anezhañ e brezhoneg!

Trugarez ha gweladenn vat deoc'h,

Mirdi Breizh

# Les Bretons et l'argent

*« Teuler ur sell war an Istor, mont war-gil etrezek un amzer dremenet, pe evel m'en dije lavaret Racine, etrezek ur vro bell, a ra d'an den gwelet e amzer eus an diabell, hag evel-se e c'hall gwelet gwelloc'h peseurt kudennoù a zo heñvel, pe peseurt kudennoù a zo disheñvel, ha peseurt diskoulmoù zo dezho. »*

Marguerite Yourcenar

## 1 - Ar pezh a anavezomp diwar-benn ar Vretoned a vremañ dre an arc'hant...

Troet eo ar Vretoned d'arboellañ kentoc'h eget da foeltrañ : espernet o deus 53 miliard a euroioù e 2009, ar pezh a lakae anezho er plas kentañ er Frañs.

Espern abalamour d'an aon rak an amzer-da-zont pe dastum pinvidigezhioù prest da reiñ lañs d'an armerzh ?

Petra bennak a vefe, dindan hanter-kant vloaz he deus graet an dro-spered intrudu, a zo gant kalz Bretoned, da veur a lignez ober berzh (ar familh Bolloré) pe da dud zo ober o c'hraf buan (Alexis Gourvenec, François Pinault, Yves Rocher, Daniel Rouillier, Louis Le Duff, Edouard Leclerc...).

E-pad pell n'eo ket bet kevatal an traoù evit an darn vrasañ eus an dud. Hiziv c'hoazh ez eus e Breizh, ha pa'z eo ar 15<sup>vet</sup> rannvro e-keñver ar gopr etre (28 692 € ar bloaz e 2007), un diforc'h en tu all da 11 000 € etre gennad ar gounezvouederezh (25 825 €) ha hini an arc'hant (37 550 €) evit a sell ouzh ar gopr bloaz kriz.

Bez' ez eus un istor disheñvel gant pep enkadenn. N'eo ket heñvel hini ar *subprimes* e 2008 ouzh an tarzhadegoù a zo bet renablet gant an istorourien gwechall. Dres evel freuz-stal reizhiad Law avat, a zeuas kaouadoù spont d'e heul en Ostel ar Moneiz e Roazhon e 1720, e tegasont holl barradoù aon ha disfiz ouzh ar binvioù armerzh e-pad pell.

An neb a vez o klask un dra asur a dro war-zu ar vein. Plijout a ra d'ar Vretoned kaout o zi dezho, ken gwir eo se bepred. Ur patrom istorel bet ganet gant ar manerioù eo zoken, ha kendelc'her a ra goude ar brezel gant an tiez o mogerioù gwenn, deuet da vezañ un arouez eus Breizh, hag a blij kement d'ar Vretoned.

## **Ar vein, un danvez hag a vez fiziañs ennañ.**

Ma talc'her da bostañ arc'hant er madoù diloc'h daoust da enkadenn an arc'hant, ez eo abalamour ma vez fiziañs er vein hiziv an deiz c'hoazh evel er mareoù kent. Gwechall e lakae ar Vretoned, ha pa vijent noblañsed pe bourc'hizien, o arc'hant e-barzh an douar ma lakaent sevel kastilli, tiez meur, manerioù pe menajoù.

Pa voe savet, lakaomp, maner Kervataman Vras (Pederneg) e norzh Aodoù-an-Arvor, lec'h ma 'z eus renablet 1 300 maner, eo splann e klaske ar perc'henn e-giz-se, evel ar re all, delc'her e renk. Ranket ez eus lakaat 50 vloaz, etre 1520 ha 1584, a-benn sevel anezhañ, se zo kaoz e kaver meur a stil ennañ an eil da-heul egile : gotek e tu an norzh, azginivelezh e tu ar c'hornôg.

Daoust ma oa kouezhet al leve-font e 1850 ne oa ket cheñchet speredoù an dud ; e-pad pell c'hoazh e talc'has lod da lakaat arc'hant er vein pa oa kalz a dud all o c'hortoz ma vefent lakaet kentoc'h en ijinerezh ; pa grogas ar familh Oberthür d'ober berzh en ijinerezh e lakaas sevel meur a ostel prevez !

Goude ar brezel eo en em ledet an dro-spered-se muioc'h-mui e-touez ar boblañs ken emañ ar maezioù war var da vezañ distummet gant tiez-annez o mogerioù gwenn, klichedoù eus Breizh ma 'z eus, hag an tachennoù labour-douar war var da zigreskiñ betek re. Hervez an douaroniour Jacques Lescoat e vefe kollet 8 500 hektar bep bloaz gant al labour-douar (ar pezh zo kement ha gorread ar Gerveur).

## Rivinet

E 2008 e oa bet kolloù arc'hant dreistmuzul abalamour d'ar brokerezh.

Gwechall ivez e voe rivinet tud zo gant degouezhioù heñvel.

E 1720 en doa bet bed an arc'hant disfiz ouzh ar bilhedoù paper a oa bet lakaet e-plas ar moneiz gant John Law, anezhañ ur banker skosat hag a oa karget eus aferioù arc'hant Bro-Frañs. Diwar se e klaskas ar re a oa bilhedoù bras en o c'herz kaout re vihan, aesoc'h en em zizober anezho, ha moneiz metal un tamm. Dont a reas soudarded ha milisianed da lakaat urzh el lostennadoù tud a oa dirak draf an eskemm bilhedoù e porzh Ostel ar Moneiz e Roazhon (a oa gwechall e straed ar Moneiz). War an tu dehoù koulskoude e c'halle an « itronezed meur », ar vistri a gêr hag ar gloer eskemm o bilhedoù didrabas, gwarezet gant ur renkennad soudarded.

Pa voe divizet gant an Directoire, e 1797, ober gant moneiz metal adarre, ha dre-se nullañ talvoudegezh ar paper-arc'hant, e tastumas teñzorer Naoned ar pezh a vefe aet d'ober ur sammad a 351 476 lur digant an dud a oa bet rivinet.

## **An espern**

Troet eo ar Vretoned d'arboellañ kentoc'h eget da foeltrañ : espernet o doa 53 miliard a euroioù e 2009 gant aket, ar pezh a lakae anezho er plas kentañ e Frañs.

Ar sammadoù brasañ e oa ar re a veze lezet ganto war ar c'hontoù-red (14,4 miliard a euroioù). 15,5 miliard € e oa an endalc'hioù war o levriegoù-espern, hag 11,7 miliard a euroioù a oa war o steuñvoù espern lojeiz (kresket e oa lod ar re ziwezhañ-se eus 6 % e 2010, ar pezh a ziskouez pouez ar madoù diloc'h en doare ma vez meret o arc'hant gant an dud).

## **An digevatalderioù**

10 % izeloc'h eget gopr etre Bro-Frañs eo hini Breizh bepred, hag ar 15<sup>vet</sup> rannvro e-keñver ar gopr etre (28 692 € ar bloaz e 2007) abalamour m'eo digevatal ar goprou. Ouzhpenn-se ez eus un diforc'h en tu all da 11 000 € etre re ar gounezvouederezh (25 825 €) ha re bed an arc'hant (37 550 €) evit a sell ouzh ar gopr bloaz kriz.

Gwechall e oa paour an darn vrasañ eus an dud, lod anezho paour-du zoken, betek fin an 19<sup>vet</sup> kantved. Dav lavaret ivez e oa Penn-ar-Bed, e 1864, er plas diwezhañ e Frañs e-keñver ar c'horvoder dre zen gant 262 lur ar bloaz (587 lur er Seine-Inférieure).



## An dro-spered intrudu

Kement ha mont enep d'ar c'hliched hag a ra d'an dud soñjal ne vefe ket eus ar spered-se e Breizh, ez eo an hent a zo bet heuliet gant mistri greanterezh ur skouer evit ar rannvro. Deuet eo o berzh, pe e vefent lignezoù embregerien (ar familh Bolloré) pe tud hag o deus graet berzh en ur ober un daou-ugent vloaz bennak (Yves Rocher, Daniel Rouillier, Louis Le Duff, Edouard Leclerc « ispiser Landerne »...), diwar obererezhioù en embregerezhioù kentoc'h eget diwar vrokañ war an arc'hant, ha diwar un anaoudegezh eus « marc'hadoù ar bed » ; implijet e vez 30 000 a dud gant François Pinault en un tregont bro bennak. Kroget int war bep a dachenn disheñvel, meur a hini avat o deus emellet eus gounezvouederezh.

Da skouer, e 1880 dija, e lakaas Louis Levesque, greantour e Chantenay e-kichen Naoned, e arc'hant da brenañ listri-bale cheuc'h (*Viviane, Vétille*).

Diskouez a raent a-wel d'an holl, asambles gant ti an aotrou, ur binvidigezh deuet diwar ijinerezh ar boued (riz, amann sall ha boestadoù sardined). Deuet eo hiziv an deiz da vezañ logo un toull-hent da vont tre e kêr Naoned.

80 vloaz diwezhatoc'h e oa bet planedenn Alexis Gourvenneg (1936-2007), « peizant pennrener » anezhañ, tro-ha-tro hini ur produer legumaj eus Bro-Leon, ur sindikalour nerzh gantañ, ur frammer marc'hadoù (SICA Bro-Leon) hag ur saver moc'h da c'houde hag a lakaas arc'hant er merdeñ. Eñ a savas e 1973, asambles gant peizanted all, an embregerezh paramantiñ BAI-Brittany-Ferries a ra muioc'h war-dro treuzdougen tud hiziv an deiz eget fred diwar labour-douar evel ma rae da gentañ-penn.

## **2 - Dre ar bed-holl**

### *Pinvidik mor*

**1. Kerkent hag e fin ar Grennamzer e oa ar mor afer ar Vretoned.**

Mont a rae o bigi, bihan o ment peurliesañ, hed-ha-hed aodoù Europa ar c'hornôg, dreist-holl re Flandrez, unan eus broioù pinvidikañ Europa da neuze. Anavezet e oa porzhioù Breizh (Gwaien, Rosko ha Penmarc'h dreist-holl) eus Bro-Spagn betek ar Mor Baltel.

Er broioù-se lec'h ma 'z aent d'eorian e veze graet prenoù gant ar Vretoned, neuze e lakae ar parrezioù bitrakoù-liderezh pe kinkladurioù bras da zont eus Flandrez. Reiñ a rae ar Vretoned arc'hant evit sevel porzhioù-iliz kaer-eston e Bro-Leon pe evit sevel o ziez dezho, tiez pompus ar juloded, anezho peizanted ha marc'hadourien lien eus Bro-Leon, pe osteloù hag annezoù diwar ar maez ar baramantourien vras (manerioù Sant-Maloù, ar follezhoù tro-dro da Naoned).

Da vare an Azginivelezh e veze gounezet forzhik arc'hant gant kenwerzh ar gwiadoù a veze implijet d'ober gouelioù ar bigi pe rochedoù fin. Nezañ ha gwiadiñ a raed e pep lec'h, met evit ezporzhiañ e veze produet lien kanab e kornad Lokorn (olonne) hag er vro etre Roazhon ha Gwitreg (noal ha kanavaz), ha lien lin e Bro-Leon (krez) ha diwezhatoc'h e kornad Kintin-Monkontour-Uzel (ur seurt lien a veze graet lien Breizh anezhañ).

Betek fin an 18<sup>vet</sup> kantved e lakaas ar c'henwerzh-se metalioù prizius eus Amerika da zont da Vreizh.

## Foarioù ha marc'hadoù

Dre an hentoù-douar e veze ezporzhet ar chatal bras. Evit an amann avat a yae dre vor peurvuiañ. Bep bloaz e veze kaset milieroù a gezeg pe a saout etrezek ar reter, betek Pariz a-wechoù. Alies e raed arsavioù e foarioù pe marc'hadoù ispisial evel ar foarioù kezeg e Plistin e Bro-Dreger pe muioc'h c'hoazh er Merzher-Salaun pe er Folgoad e Bro-Leon. Daoust da se e valee an darn vrasañ eus foarioù Breizh (etre 700 hag 800 ar bloaz e fin ar renad kozh) gant an eskemmoù lec'hel. Ken gwir all e oa, ha gwiroc'h c'hoazh zoken, evit ar marc'hadoù. Bras-spontus e oa pouez an emgavioù-se, a veze dalc'het ingal, evit an eskemmoù betek ul lodenn vat eus an 20<sup>vet</sup> kantved. Mont a raed di evit prenañ pe gwerzhañ produioù al labour-douar pe diankajoù evel-just. En ober a raed ivez avat evit dispign arc'hant, na oant ket aes da c'hounit peurvuiañ, hag e-giz-se plegañ d'an temptadur o welet danvez plijadurioù e-leizh – ar c'hoarioù, ar boeson, an ebatoù hag an holl draoù da breñañ n'en deze ket an den, anezho traoù da vegañ spered an den, d'ober dezhañ bezañ disheñvel diouzh ar re all ha mont diouzh ar gizioù nevez.

81% eus an 995 bag a yae tre e porzh Arnemuiden, rakporzh pennañ Antwerpen, e 1533-1534, a oa eus Breizh !

## **Al lec'hioù d'ober marc'had.**

E-lec'h ober marc'had e straedoù strizh kroazigellet ha plasenoù bihan ar c'hêrioù kozh, e oa gwell gant ar genwerzhourien lec'hioù frank ha nevez : ar fabourzioù. Un dachenn frank ha kompezet a veze savet warni stalioù dister, un davarn. War ar foarlec'h-se emañ ar beizanted o sellet pizh ouzh al loened ; kengevratourien en em laka a-du war ur priz bennak gant pep a daol dorn e dorn egile ; en dalenn gentañ e weler stal ur marc'hadour oignon. Bez' ez eus ur beizantedez o werzhañ he moc'h...

Met degas a ra Olivier Perrin da soñj deomp e oa ar marc'hadoù ivez tolpadoù sokial o doa ezhomm un davarn, ul lotiri... Ouzhpenn an dañsoù e veze ar c'hoarioù boas. En unan anezho, ar « fouilh-chakot », e laka ur galant e zaouarn e chakot ur plac'h yaouank abalamour da gavout ennañ kraoñ-kelvez pe avaloù, anezho arouezioù revelezh ha frouezhusted hag a ziskouez peseurt tro zo en he santadoù.

Bez' ez eus ivez un treuzvarc'had diwar zienez : prenet e vez blev digant ar merc'hed a zo en dienez gant un den hag a ro mouchouerioù pe lien dezho en eskemm. Gwir eo e oa ezhomm blev evit ar perukenoù a oa diouzh ar c'hiz e kêr. Filmet e oa bet un hevelep degouezh da-geñver ur marc'had e Kernaskledenn e 1909 (dielloù Pathé).

## **An arc’hant war wel, arc’hant al lien**

Alies, en ilizoù hag er chapelioù e Breizh, e veze kizellet ar sablerioù, anezho an treustoù a zoug framm an toennoù. Evel an arrebeuri ne ziskouezont ket kalz a draoù hag a dennfe d’al lien, koulz a-fet produiñ pe gwerzhañ, ha pa oa ken pouezus an obererezh-se e Breizh etre fin ar Grennamzer hag an 18<sup>vet</sup> kantved. War ar sabler ez eus bet taolennet marc’hadourien mezher. Re vras eo skeudennet ar pezhioù-moneiz e-keñver an traoù all a weler war an delwenn-se, lakaet uhel ha pell a-walc’h diouzh selloù an dud. Diskouez a ra kement-se ez eo an arc’hant ar pep pouezusañ a zo da welet. A-dreñv un daol hir ez eus pevar den, daou anezho zo o tornata arc’hant, unan o skrivañ war ur roll hag an hini diwezhañ o tougen ur pezh danvez. Daoust hag emeur o werzhañ danvez d’ar pratikoù a zo tro-dro ? Pe neuze ez eus marc’hadourien o prenañ danvez hag a vo gwerzhet d’ar broioù estren goude-se ? Sklaer eo ez eus kaoz eus monedone rak pelloc’h war ar sabler e weler kezeg graet evit charreat. Met e-lec’h ur foar pe ur marc’had bras, ha ne vefed ket aze o kontrolliñ kalite an danvez, gant gwirioù da baeañ d’ar pennadurezhioù ?

Ur pezh arrebeuri hag a blije kalz d’ar beizanted-marc’hadourien lin a Vro-Leon eo pres al lin. Ennañ e veze berniet an neud er penn-traoñ, ha renket ar piladoù lien er penn-nec’h. Kinkladurioù e-leizh zo : ur Werc’hez he Mabig Jezuz, un unarouez IHS (Jezuz Hon Salver) ha tresoù e doare an Azginivelezh. E-kreiz ez eus un den hag a zo o « tiskouez » e vadoù. Ur yalc’had zo gantañ en e zorn. A-zehou dezhañ e weler ur c’hrog-pouezer. Kizellet eo bet ar pouez en traoñ hag ar garg en nec’h., war an tu gin. A-gleiz dezhañ e weler traoù a hañval bezañ lin steuñvet ha plezhet, krez moarvat.

### 3 - An arc’hant war ar pemdez

E-pad pell ne veze ket gounezet kalz arc’hant gant ar familhoù ha rouez e oa ar pezhioù moneiz zoken. Diwar se e kustumed ober an eskemmoù gant marc’hadourezh. Gant ar merc’hed e veze kontrollet dispignoù an tiegezhoù hag ar moneiz a veze gounezet ganto. Adalek kreiz an 19<sup>vet</sup> kantved e voe kavet gwelloc’h, el labouradegoù, paeañ ar goprou gant arc’hant dizolo, anez paouez da vat d’ober gant doareoù etre evel gobariañ pechezgant paneroù. Ouzhpenn ur c’hevala e oa ar c’haoudoù : « madoù a enor » e oant ivez. Plijout a rae da bep hini diskouez splann ar c’haoudoù a oa dezhañ o verkañ warno tresadennoù, deizioù pe anvioù dreist-holl. Degaset e veze an arouezioù-se da-geñver lidoù a-stroll, evel an euredoù ma veze treuzkaset kalzik madoù.

Nag ar re n’o doa netra ? E-pad pell, da vare an enkadennoù war ar maez, e tremenas an dud gant an aluzen pe ar burevioù madobererezh. E penn kentañ an 20<sup>vet</sup> kantved avat, abalamour ma voe fromet-kaer an dud o welet familhoù micherourien lezet a-gostez er vuhez armerzhel, e voe roet lañs, gant maered hag eskibien, da soubenn ar beorien pe da obererezhioù da gemer plas ur vicher bet kollet, evel an dantelez. Gallout a rae bezañ e stumm ur c’hoari a-stroll ivez, evel an Eginane, anavezet e Breizh betek fin an 19<sup>vet</sup> kantved, a oa ur gest evit ar beorien gant kan, chalivari ha kruz taboulinoù. Ha penaos komz eus arc’hant ? Er stalioù, kentoc’h eget embann ur c’hoant gounit, e veze gwell d’an dud diskouez o doa fiziañs pa lavarent : « *N’eus ket pres war an traoù* », pe « *gwelet e vo* ». Anez komz eus bed al labour-douar ma veze graet ar marc’had gant un taol dorn en ur lavaret « tonkit aze ! » evit diskouez gant un doare le sakr, kement ha klozañ, e oad a volentez vat.

## **Perc'hennañ gant asant ar re all**

### **Al lidoù war ar maez**

Er gevredigezh hengounel e Breizh e veze lakaet ar madoù personel da vont, « ez ofisiel », e-barzh peadra ar familhoù dre lidoù a-stroll. An euredoù, evel an obidoù, a oa degouezhioù dibar ma yae ar madoù eus un den d'egile ; diskouezet e veze ar profoù a-wel d'an holl e kornad Kemper.

E Kerne e oa bet sellet pizh gant an treser Olivier Perrin (1761-1832) ouzh ar boazioù en-dro d'an euredoù ma veze, tro-ha-tro, priziet ar madoù, paeet an argouroù, prenet ar profoù, graet c'hoarioù arouezek p'en em gave arrebeuri ar plac'h-eured e ti an dud nevez..... Diell klewelet

Ar veleien ivez a gemere perzh, kement hag ober, en ur c'hiz en-dro d'an arc'hant : an « trizegad ». Profañ a rae ar paotr nevez, d'ar plac'h nevez, trizek pezh arc'hant a oa bet benniget gant ar person. Goude-se e kemere an dud nevez pep a c'hwec'h pezh ha chom a rae unan gant ar person. Un arouez e oa eus kumuniezh ar madoù etre ar priedoù.

## **Kinklañ zo kement ha piaouañ.**

Personelaat traoù ordin ar pemdez zo perc'hennañ anezho. A-wechoù e oa trawalc'h o fichañ evit diskouez pegen pinvidik e oad, evel gant al loaioù a veze profet pe implijet en euredoù.

Gwechoù all ne oa nemet lakaat e anv warno d'ober : da Vatilina Filiz, ur fererez kofoù ha dantelez emañ hec'h anv war an troad, e oa ar gloge ampez. Merket eo war ar voest-vutun, e-mesk troellennoù, rozennoù hag ur grusif, e oa d'un tavarnour eus Naoned, 32 vloaz dezhañ, Gautier e anv.

Alies e veze diskouezet ar boestoù-butun en ilizoù ; kustumiñ a rae ar fabrikered (al laiked a rae war-dro aozañ an oferennoù) reiñ pep a brizenn vutun d'ar barrezianiz vrokus e-kerzh ar gest. Dav eo gouzout e oa ar butun un dra a bouez a-fet politikerezh ha kevredigezh e Breizh da vare ar Renad Kozh. Arabat ankouaat e tarzhas emsavadeg ar Bonedoù Ruz e 1675, e-touez abegoù all, abalamour ma voe kemennet e vefe krouet monopol kenwerzh ar butun gant ar roue e 1674 ha kresket ar priz. Mat eo menegiñ ivez o doa goulennet er C'hod Kouer, bet skrivet ganto e 1675, ma vefe roet butun evit netra e-pad an oferenn.



## Paeañ

Gwechall e oa diouer a arc'hant. Ne veze ket gounezet nemeur gant ar familhoù. Rouez e oa ar pezhioù moneiz o-unan.

Gant-se e kustumed eskemm marc'hadourezh.

Paeet e veze ar varc'hadourien-red, anezho gwir batromoù evit frankiz ar c'henwerzh, a zor da zor. Ne oant ket deuet mat d'ar genwerzhourien divonedus a rae gant prizioù divizet gant tud kêr Roazhon (he neket gant melestradurezh ar roue) ; trubuilhoù sokial a c'halle tarzhañ ma kreske re ar prizioù.

Kustum e vezed da paeañ war-eeun gant arc'hant laosk. Koulskoude e chome an dud hep diskouez tamm c'hoant gounit ebet. Diskouez a raent o doa fiziañs kentoc'h : « N'eus ket prez warnon », « Gwelet e vo ». Heñvel a-walc'h e oa e bed al labour-douar ma veze graet marc'had gant jestroù da ziskouez e oad a volontez vat : skeiñ ha stardañ dorn an eil egile en ur lavaret « Tonkit aze... »

## Tonkit aze !

« Kregiñ a ra e dorn ar marc'hadour hag en ur reiñ ur pezh taol ennañ e c'houlenn digantañ lavaret ur priz bennak. Hennezh all ha tapout krog e dorn Kaourintin, hag en ur reiñ ur mell taol ennañ e rabat war ar pezh en doa goulennet da gentañ. Ur wech straket ha stardet o dorn ganto, ez eo sakr al le. »

Alexandre Bouët. 1808.

« 93 lur en arc'hant, 6 gwalennad lien, ur roched hag ur bragoù berliñj glas, daou re votoù-koad, un astellad gwinizh...».

Gopr Gwilhom Aofred, mevel war ar maez e Prad (Aodoù-an-Arvor) 1867-1868

## Gounit arc'hant

### Labourat

Meur a zoare zo bet da rannañ ar gounidoù a-hed an istor a-raok na vefe eus ar goprou digemm. War dachenn pesketaerezh ar sardined, lakaomp, evit gouzout pet pesk a oa bet tapet gant hemañ-henn e veze graet gant traoù dibar : evit ur mareaj, e bourzh ur chaloud, e veze ezhomm d'ober gant meur a roued asambles ; merkoù a veze lakaet warno evit gouzout da biv e oant. Kontet e veze ar pesked dre banerad. E Douarnenez ez ae 5 sardin d'ober ul « lañs », 20 « lañs » d'ober ur « c'hant », daou « gant » d'ober ur « baner », a veze graet *baskodenn* anezhi. Er friturioù e veze jedet ar goprou diouzh ar c'hementad a sardined bet arbaret. Ur mare zo bet e voe deuet mat an horolaj poentañ a reas d'ar gopr bezañ muzuliet diouzh an amzer.

Pa grogas al labour da vezañ paeet gant goprou arc'hant e veze roet arc'hant laosk war-eeun, ouzh draf ur c'hontaouer. Nevez zo eo en em gavet an treuzkasadennoù bank.

« Karget e vez unan bennak da resev ar paneroù (dav kemer evit ar post-se un implijadez a c'haller fiziout enni). Reiñ a ra ur jedouer ouzh 400 sardinenn d'ar besketaerien. Roet e vez dezhi un tiked tennet eus ur roll gant seulennoù en eskemm ouzh ar jedoueroù-se... »

Fritur Amieux Konk-Kerne. 1890.

« Da-heul c'hwezh sardin e teu c'hwezh argant »

Komzoù lavaret gant ur « plac'h ar frit », a oa o labourat en ur fritur. Douarnenez, war-dro 1950

## Hag ar re n'o doa netra ?

E Breizh gwechall ez eus bet ingal eus paourentez ha klaskerezh. E Breizh-Izel, keit ha ma oa ar rederien-bro marc'hadourien-red war ar prim, bazhvalaned, ne vezent ket deuet fall, e-lec'h e Breizh-Uhel e vezent kaset hep damant betek ar burevioù madobererezh. Ne dremene ket ar glaskerien-bara da dorfedourien, gant-se e veze roet an aluzen dezho ; desket e veze d'ar vugale en ober zoken. Bez' e oa eus c'hoarioù a-stroll ivez, evel an Eginane, anavezet e Breizh betek fin an 19<sup>vet</sup> kantved, a oa ur gest da zastum radoù, boued pe arc'hant da-geñver prosesionoù enno kan, chalivari ha kruz taboulinoù.

Ne oa ket an den evit goulenn sikour digant ar Stad ; ne c'halle en ober nemet e diabarzh ar familh, pa digant an ti-kêr. Gant hini Roazhon, da skouer, e voe dalc'het bara d'ar beorien e miz Gouhere 1832 kement ha lidañ deiz-ha-bloaz ar Restaorasion. Renablet e voe 114 familh e straed Naoned. E Bro-Gerne avat, e 1903, e oa ken bras an dienez e-mesk ar familhoù pesketaerien da-heul pesketaerezhioù fall, ken e rankas an tiez-kêr hag an eskopti aozañ ar sikourioù en un doare skiantek. Tud e-leizh a yae da soubenn ar beorien tra ma veze savet stalieroù dantelez gant itronezed madoberus evit degas un tamm gopr ouzhpenn d'ar familhoù. Koulskoude ne oad ket kustum d'ober dantelez e Breizh.

« Du-mañ e oamp paour, met ne oamp ket peorien. »

Jules Romain

## **Aozañ ar garitez**

### **Roazhon. 19<sup>vet</sup> kantved**

Er saloñsoù ofisiel e veze lakaet ur voest a-wel d'an holl geodedourien pa veze dalc'het ul lid bennak. Merket e oa « Koun » war-c'horre ar golo, a oa ur faout ennañ, hag « evit ar beorien » war an tu diabarzh.

E 1825, hag e 1901 bepred, e veze aozet sonadegoù gant an ti-kêr « evit ar beorien » hag evit brudañ arzourien Roazhon war un dro ; skoazellet e veze gant ar burev madobererezh ha studierien Skol an Arzoù-Kaer a rae tresadennoù ar programmoù.

### **Karantez zo interest... Micherourien en dienez...**

Pa ne vev ur c'hornad nemet diwar un obererezh, ne c'hall ket obererezhioù all kempouezañ pa vez un enkadenn. Da skouer e 1903 e Douarnenez, ur porzh 13 000 a dud ennañ, troet war-zu ar sardineta, pa grogas ar sardined da rouesaat e doureier Breizh. Da-heul mareajoù fall ar besketaerien ne voe ket labour ken evit o gwraez a labourer er friturioù, ha tamm gopr ebet ken er familhoù neuze. Kavet e voe sikour digant an ti-kêr, a reas war-dro delc'her boued pe aozañ « soubenn ar beorien ». An eskopti, diouzh e du, a reas e lod ivez. Aozet e voe gant maouezed an noblañs stalieroù fardañ piko, un doare dantelez hag a veze gwerzhet dre vetrad. Ne veze ket implijet evit dilhad hengounel Breizh : kaset e veze da atalieroù dilhaderezh e kêr. Ledet e voe brud an enkadenn-se gant ar studio Villard e Kemper, a lakaas embann kartennoù-post hag a ziskoueze taolennoù amplik savet diwar-benn dienez ar vicherourien.

« Aotrou 'n Eskob, un islonk eo Douarnenez... Amañ e vez sikouret 1 722 familh (enno 6 den well-wazh) diwar o goulenn. ».

Sachañ a ra ar person evezh an Aotrou 'n Eskob Dubillard war Douarnenez.

## **4 – Kelenn an Espern, espern ha prestañ**

**E-pad pell ez eus bet graet stank gant ar c’hred. Ret e oa amprestiñ evit an hadañ, evit paeañ an tailhoù pe ar frejoù eurediñ... Amprestet e veze digant uzurerien ha dreist-holl digant tud ar familh.**

**Evit en ober didrubuilh e voe ijinet doareoù da brenañ war zle gant ar stalioù ; evel ar c’hoch, un tamm koad troc’het etre daou, e ti ar varaerien.**

**Adal ma voent gouest d’en ober e krogas an dud da lakaat arc’hant a-gostez, gant harp ar pezh a veze desket er skol kentañ derez.**

**Nag ar bankoù kentañ, stalioù familh e oant hag a sache war o zu arboelladoù a veze postet e stumm kevalaoù evit ar greanterezh hag ar c’henwerzh. Met diaes e oa dezho en em ober diouzh ar c’hevezerezh gant ar bankoù broadel, dreist-holl ar c’hefioù espern.**

**Digeriñ a reas an embregerezhioù o-unan d’ar c’hevalaiñ pa c’hallent, dre ar statud nevez a « gevredad dre gevrannoù », skignañ miliadoù a gevrannoù a veze prenet gant arboellerien.**

**Pouez an Iliz ne oa ket digresket evit kelo-se ; strivañ a reas da ziazezañ ur rouedad bankoù et kenwarez hag a zo mestr hiziv war ouzhpenn an hanter eus stalioù-bank Breizh.**

### « Marv eo ar c'hred »

Pa c'houlenne ar genwerzhourien hag an davarnourien bezañ paeet war an taol, e harzent ouzh an dud a ober gant ar c'hred d'ar beveziñ.

Degouezhout a rae stank, ken e veze embannet skeudennoù pobl a oa o zitl « Marv eo ar c'hred, lazhet eo bet gant ar gwall baerien ». Tri sort tud a veze tamallet aze : un arzour, ur muzisian hag ur mestr-armoù, berr an arc'hant ganto, zo aet d'ar c'hred, anezhañ un den marv astennet war al leur. En eil talenn e weler ur breolimer, sioul diouzh e du, e gorn-butun gantañ en e veg, hag a c'hoari roll al « libonig » (an hini na c'hounez nemet a-nebeudoù) na c'halla ket amprestiñ ken diwar neuze.

Degas a ra skeudenn ar waz, a zo ur yalc'h en he beg, da soñj eus ar c'hoari gerioù e galleg etre « mon oye » ha « monnaie ». Respont a ra ar frazenn « Mon oye fait tout » da « marv eo ar c'hred ».

Lakaet e veze skeudennoù Epinal seurt-se ouzh barlenn ar stalioù evit lavaret e ranked paeañ war an taol.

### **« Paeañ gant ar c'hoch ».**

Faoutet e veze ur wialenn gelvez hed-ha-hed etre daou, evit delc'her ar gont eus ar bara a veze prenet war zle e ti ur baraer. Mont a rae un tamm gant ar pratik, egile gant ar c'henwerzhour.

Pa veze prenet bara e veze adlakaet an daou damm stok-ha-stok hag e veze kontet ar c'hochoù boutin etrezo. Neuze e vezent dispartiet adarre ha chom a rae pep a damm test gant an dud. Paeet e veze an dle gant ar pratik bep miz pe bep eil sizhun.

Anavezet e oa ar benveg-se evit paeañ war zle e Roazhon ha war ar maezioù tro-dro. Diskouez a ra deomp ur c'hod anaout, hag a gaver er bed a-bezh, graet gant tammoù eus traoù a vez lakaet asambles en-dro evit testenianñ ar wirionez : luc'hskeudennoù freget etre daou pe ar bilhedoù a veze silet un hanterenn anezho etre lienoù ar vugale bet dilezet ha roet d'an ospital. Gant an tamm a chome ganti e c'halle ar vamm anaout he bugel pa vefe gouest d'adkemer anezhañ diwezhatoc'h.



## **Arc'hant an aferioù ?**

### **Arc'hant diwar ar maez da gentañ-penn.**

Peogwir e ouie mat ar bankoù hag an embregerezhioù n'o dije ket graet berzh an ijinerezh hag ar c'henwerzh nevez-krouet anez berniañ kevalaoù, en em lakajont o-unan, en 19<sup>vet</sup> kantved, da zastum arc'hant da vezañ postet.

An arc'hant diwar ar maez a veze dastumet da gentañ, dreist-holl gant ar C'hef espern hag a roas lañs d'ur rouedad isstaliou a veze digoret da-geñver ar foarioù, ar c'homisoù hag ar marc'hadoù. Savet e voe ur sez e Sant-Brieg e 1911, gant an ti-savour Georges Lefort (1875-1954), gant kalz a don : skalieroù ledan war an treuzoù, prenestroù palladian, begoù siminalioù uhel, materi pinvidik...

Evit an embregerezh « Govelioù ha lavnennerioù Le Bourget ha Breizh » staliet e Sant-Brieg, pa zeuas da vezañ ur c'hevredad dre gevrannoù edo o c'hortoz tolpañ 4 milion lur a gevala goude bezañ krouet 16 000 kevrann hag a dalveze pep a 250 lur. Lusket e oa gant un dro-spered rannvroel avat ; ar merk-se a oa kement hag ur skeudenn eus ar « Breton bihan ».

## 5 - Diskouez ez eus graet berzh

Emañ « sevenadur an neuz » en e vleud e Breizh.

En gwelet a reer, evit diabarzh an tiez, er salioù degemer, evel gant Lucas Royer, marc'hadour-lien eus Gwitreg, a lakaas taolenniñ anezhañ e 1583 gant dilhad ur bourc'hiz a afer hag a zo o tiskouez e yalc'h.

War ar maez eo dre an arrebeuri en gwelomp ar muiañ, evel « tal an armelioù » a ziskouez e oa kresket ar madoù e stumm arrebeuri. Kinklet e veze an arrebeuri diouzh aez an dud a lakae ober anezho ; da skouer e oa bet diouzh ar c'hiz lakaat gwerzhidi koad turgnet e-leizh.

Bez' e oa « sevenadur an neuz » ivez un doare da reiñ d'anaout ar pezh a veze tavet warnañ, ar rummadoù sokial dreist-holl. An dud vunut ne ginklent ket nemeur o dilhad, e-lec'h ar re binvidikañ a bae broderien ; ezhomm o deze etre daou ha tri miz a-wechoù evit brodañ ar bleuñv war an tavañjeroù, ar pluñv paun, ar raden, ar c'herniel meot, chadennoù ar bed war ar jiletannoù.

« *Ar renkennadoù zo kement hag hektarioù* » hervez ur c'hrennlavar hag a ra anv eus ar jiletannoù a veze gwisket an eil war eben gant ar baotred a lakae ar bevennoù da zibaseal dre zindan.

## Lakaat e binvidigezh war wel

### An arrebeuri Branthôme (Rostrenenn)

Kustumiñ a raed kinklañ an arrebeuri gant tachoù kouevr, marelladurioù, bozennoù – en atalier Branthôme e Rostrenenn avat ne veze graet nemet gant un doare tresoù : ar bleñchoù troell, avaloù pin karrezennet d’o heul a-wechoù. Lakaet e vezent da ginklañ ar bannoù pe an treuzelloù, e stumm ur skourr simpl, ha dreist-holl al lodennoù plat etre an dorioù. A-wechoù e veze fichet ar pannelloù hed-ha-hed ; evit ober se e ranke ar c’hizeller labourat meur a sizhunvezh gant sikour gobarioù.

War unan eus ar pezhioù arrebeuri-mañ e oa ur blakenn houarn merket « Valentin Branthôme, bet ti an intañvez Branthôme, Rostrenenn » ; ganti e veze « sinet » an arrebeuri eus an dibab.

Deuet e oa Valentin e 1899 war-lerc’h e vamm a oa gwreg da Charles Branthôme, a oa bet krouet ar stal gantañ. Produiñ a raent traoù damc’hreantel, betek 400 pe 500 pezh ar bloaz.

« Soñj en deus c’hoazh eontr Tist eus ur plac’h yaouank re c’hoantek a zeuas da welet anezhañ hag e vreur, pa oant oc’h echuiñ deskiñ o micher, d’ober neudañ eviti, a-benn dimeziñ, ur gwiskamant bras heñvel dres ouzh hini ur bennhêrez all, dimezet ar bloaz a-raok. Kerent ar bennhêrez-se, avat, e oa dezho un ugent devezh-arat bennak muioc’h eget da re ar gliantez nevez. Diaes e oe da Dist ha da Jelvestr ober klevet da homañ e ranke chom gant ur gwiskamant disteroc’h. [...] Bez’ e c’helle ar verc’h touellañ an daoulagad, met azaouezet ’oa bet gant an daou gemener-neud skeul-renk an danvezioù. »

Pêr-Jakez Helias. Marc’h al lorc’h. 1975

### **Dre ar c'hinkladurioù e lavarer ar pezh a daver warnañ**

Evit kinklañ e oa ezhomm eurioù labour hir gant artizaned ampart hag a ranked paeañ, gant-se e veze degaset kinkladurioù diouzh peadra ar pratikoù. Diwar-se eta niver an delioù, an tachoù ha dreist-holl ar gwerzhidi a veze lakaet a-steud, e stumm rozennoù war div pe deir renkennad, pe war valir.

Er gwerinier ma veze klenket ar c'hurunennoù plac'h-nevez e oa an niver a velezourioù kement ha diouganou a binvidigezh.

Ezhomm a veze etre daou ha tri miz labour gant ar vroderien a-benn fichañ dilhad ar familhoù gant tresoù bleuñv, pluñv paun, raden, kerniel meot, chadennoù ar bed. Se zo kaoz e oa bet ar beorien ar re gentañ o prenañ dilhad marc'had-mat graet ha tout e kêr.

An hirder a voulouz war ur vrozh, ledander ar gourizoù lêr, ar jilettennoù a veze gwisket an eil war eben gant ar baotred a lakae ar bevennoù da zibaseal dre zindan, a dalveze da rummadoù sokial.

« Ganti tavañjer lien holland/Na sell ket ouzh merc'h ur peizant/Ar rubanoù ouzh he laso/'Gouste ur bistolenn »

« Gwechall pa oamp bihan e vezemp lakaet da gousket e foñs ar pres pe en daol hag ez aemp tout e-barzh evel razhed bihan dre ar raclejoù. ».

J. Gros, Le trésor du breton parlé, 1974

## 6 - An arc'hant hag ar galloud

Ne oa nemet ar pennadurezhioù politikel o deze ar gwir da gognañ pezhioù moneiz, ar pezh a voe gwelet a-hed an istor abaoe ar C'halianed. Da vare an duced Moñforzh (1364-1491) e voe kognet pezhioù aour ouzhpenn re arc'hant, ar pezh a zo sañset da vezañ graet gant ar roueed hepken. Adal ma voe staget Breizh ouzh Rouantelezh Frañs n'he doe ket pezhioù moneiz dezhi hec'h-unan. Daoust da se e reas stalioù-kognañ Roazhon ha Naoned berzh spontus gant aour hag arc'hant Bro-Spagn a voe degaset gant ar c'henwerzh e fin ar 16<sup>vet</sup> ha penn kentañ ar 17<sup>vet</sup> kantved ; da neuze e oa Ostel ar Moneiz Roazhon unan eus ar re a labourere ar muiañ er rouantelezh.

Adalek an 18<sup>vet</sup> kantved en em gavas, ouzhpenn ar moneiz metal, ar moneiz paper : c'hwitet e voe an taolioù-esae kentañ gant Law, war-dro 1720, pe gant paper arc'hant an Dispac'h. N'eo nemet en 19<sup>vet</sup> kantved ma voe skignet ar paper moneiz da vat e-mesk an dud.

Ur benveg propaganda eo ar moneiz ivez. Ret eo lavaret ez eo an arc'hant hag ar galloud breur ha c'hoar ; e 1693 e oa maer kentañ Roazhon, Pierre Gardin de la Gerberie, un den hag en doa graet fortun e bed an arc'hant ; e 1695 avat en doa adwerzhet e garg evit 25 000 lur tournez da Toussaint Rallier du Baty. Lakaet e veze sevel truajoù koulz gant an duced ha gant ar roueed, pe gant ar c'hêrioù o-unan. Ar chañs en doa ar proviñs, daoust da se, da gaout dreistgwirioù a bouez betek an Dispac'h, evel an dell-holen paneveken, na oa ket anezhi e Breizh. Abalamour d'an aon rak truajoù nevez en em savas an dud e 1675. Kastizet kriz e voe an emsavadegoù-se.

## **An tailhoù muiañ-kasaet**

Mont a ra arc'hant an holl e-barzh ar c'hefioù publik dre ar savadennoù urzhiet gant ar pennadurezhioù. Diazezet e oa bet gant duged Breizh, er Grennamzer, un doare daou du d'en ober hag a badas betek an Dispac'h : an tell eeun, a raed mogaj anezhañ, a veze paeet gant an dud a-ziwar ar maez dreist-holl, tra ma veze paeet an taosoù war ar monedone hag ar boeson gant tud izel ar c'hêrioù dre vras, ar pezh na oa ket aes dezho. Tamm-ha-tamm, ouzhpenn an tailhoù evit ar roue e voe savet telloù gant Stadoù ar proviñsoù, a roe en-dro un tamm mat eus an arc'hant-se d'ar roue a-hend-all.

Evit ar c'hêrioù a douche an aotreoù.

Evit sevel tailhoù eo ret aozañ ur velestradurezh ma kaver teñzorourien ha maltouterien. Arabat ankouaat memes tra ne oa ket e Breizh, betek an Dispac'h, eus an dell-holen, un dell brudet fall mard oa. Pa redas ar vrud, e 1675, e vefe lakaet da dalvezout asambles gant taosoù nevez-degaset evit arc'hantañ brezelioù Loeiz XIV, en em savas tud zo enep : emsavadeg ar Paper-timbr e Naoned ha Roazhon, hini ar Bonedoù Ruz war ar maez e Kerne. Kastizoù kriz a voe d'o heul.

## **Kognañ pezhioù moneiz : tachenn Roazhoniz**

Er marevezh modern e oa dav implijout teknikoù arbennik evit ober pezhioù moneiz, evel ma weler gant an tamm potin-mañ tennet eus ur waskerez gant momeder, eus ar 17<sup>vet</sup> kantved moarvat ha 650 kg dezhi. Rouez-bras eo. Lakaet ez eus bet ur viñs en digor kreiz : lusket e vez ar viñs-se gant ar momeder kaset en-dro gant an dud. Er penn all anezhi, e beg ur walenn en un duellenn, ez eus ur minaoued evit pukañ ar pezhioù moneiz. Pozet e vez, gant ul labourer eus ar stal-gognañ, ar pezh metal prizius gwerc'h, n'eo ket bet puket c'hoazh, war ur minaoued all hag a verko tu-gin ar pezh. Gant an nerzh skoet diwar grec'h e vez merket louc'hoù ar moneiz war an daou du war un dro. Implijet ez eus bet binvioù heñvel evit kognañ medalennoù, hag ivez gant an orfebourien hag ar vravigourien.

Dont a ra ar gwaskerezed-se eus stal-gognañ Roazhon, unan eus an div a yae en-dro e Breizh da vare ar Renad Kozh (kendalc'het en doa hini Naoned da gerzhet betek 1837). D'ur mare bennak a-raok 1873 e oa bet staliet an daou bezh-se a bep tu da zor-dal un ostel kozh eus karterioù kozh Roazhon.

## **Embann soñjoù politikel gant ar moneiz**

Krouiñ moneiz ne selle nemet ouzh ar pennadurezhioù politikel. Dav e oa da gentañ pourvezañ metal prizius, goude-se kontrolliñ ar pezhioù moneiz ha diwall diouzh ar fals-moneizañ, a oa lakaet da dorfed enep ar roue er Grennamzer ha dre-se kastizet kriz.

Ur benveg propaganda evit ar pennadurezhioù e oa ar moneiz ivez, war an tachennoù politikel ha relijiel mesk-ha-mesk. Da skouer e oa merket “dug dre c’hras Doue” war bezhioù moneiz ar re Voñforzh evit diskouez en em lakaent da emren e-keñver roue Frañs.

Hiziv an deiz eo tud an Emsav a laka adarre ar moneiz d’embann soñjoù da-geñver gouelioù ma reer ur wech dre vare gant un doare “moneiz Breizh”. Bez’ ez eus bet degouezhioù all ma voe graet gant ur seurt moneiz breizhat, evel ar bilhedoù a voe embannet e-kerzh an Eil Brezel Bed, a oa stag kentoc’h ouzh ur folkloraj rannvroel ha mirelour.



## **Pegement eo ?**

Disheñvel-mat e oa reizhiad kozh ar moneiz diouzh an hini a dalvez bremañ. Kemeret en doa al lur plas al lur tournez e 1803. Met pell e voe ar moneiz nevez oc'h en em staliañ da vat e Breizh-Izel.

Daoust ma ne veze ket kalz a arc'hant e ranked bevañ da c'hortoz an eost da zont. Gant-se e veze prenet sukr, kafe ha butun war zle. Pa vo falc'het an ed e vo tennet un tamm gwenneg bennak diwarno moarvat! Ur wech lakaet an hadajoù a-gostez, malet bleud ar bloaz, e veze gwerzhet ar greun a chome, ha mont a rae an dud neuze da c'houlenn o « fegement » digant kenwerzhourien ar vourc'h, ha paeet e veze an dleoù. Ret-mat e oa ober diouzh ar pezh a chome ac'hann d'ar bloaz da zont !

Ne vez ket graet evel-se ken, met implijet e vez an droienn-se bepred, en un doare difetis. Ma'z eus bet graet truch deoc'h gant unan bennak ken ho peus kollet arc'hant pe ez eo bet graet al lu ganeoc'h, ne rit nemet gortoz ken e vo deuet ar mare da lavaret e begement dezhañ, da lavaret eo disklêriañ a-dal dezhañ ha dirak tud all ar pezh a soñjit diwar e benn. Gallout a reot war-lerc'h lavaret, en ur ziskouez anezhañ fougennoc'h : « hemañ en deus bet e begement ganin », hag echu ar jeu.

## **Un taos war ar marc'hoù-houarn**

Meur a dra a vez savet telloù ameeun warno : an dorioù hag ar prenestroù, ar bilhardoù, ar muled hag ar marc'hoù-houarn. Gant ul lezenn eus Ebrel 1893 e voe krouet un « taos war ar c'hezekened-dir ». Rankout a raed lakaat ur blakenn houarn ouzh stern ar marc'h-houarn evit diskouez e oa bet paeet an taos. Er penn kentañ e veze merket ar bloaz war ar blakenn rak bep bloaz e oa ret paeañ un dell a 10 lur. Fichet e oant gant tresoù bleunioù, anez koachañ ar piktogrammoù « C » hag « I » kenweek a dalveze evit melestradurezh ar skodennoù ameeun.

Rankout a rae an dud o doa ur marc'h-houarn lakaat o anv war ur roll e ti-kêr o c'humun a douche ur c'hard eus an arc'hant dastumet e-giz-se.

Adalek 1943 e voe graet gant timbroù kemedel e-lec'h plakennoù. Lamet e voe an dell-se e 1959.

## **Bank Frañs da vare Vichy : ar folklor e servij ar politikerezh**

E miz C’hwevrer 1942, e-kerzh ar brezel eta, e voe skignet ar bilhed-mañ, a voe lamet kuit e 1963. Bihan eo abalamour d’an diouer a baper a oa da neuze.

Gwelet a reer war an tu mat, a bep tu d’ur ritenn enni tres Anna Vreizh, skeudenn ur pesketaer e suroa ruz hag a zo o sachañ war ur gordenn ha kêr Gonk-Kerne en eil talenn. War an tu gin ez eus div blac’h, unan ar c’hoef giz Kemper, eben ar c’hoef bigoudenn ganto war o fenn. Ken mesket all eo ar savadurioù en un doare artifisiel ; an iliz eo Itron-Varia ar Joa e Penmarc’h, ar c’halvar avat a seblant bezañ diouzh doare ar Porzhe kentoc’h (Itron-Varia Menez-C’homm moarvat).

Ne ra ket a forzh pelec’h emañ an traoù resis ! Gant ar skeudennoù-se « liv ar vro » ganto e fell da Vank Frañs mont da-heul propaganda gouarnamant Vichy a laka an deoliezh, al labour hag ar familh war-raok ken-ha-ken.

## **7 - An arc’hant hag an Iliz**

**« N’oc’h ket evit bezañ e servij Doue hag e hini an arc’hant » eme Jezuz-Krist. Kement-se a dalvez neuze e vefe kontrol an arc’hant d’ar silvidigezh ? Evit ar gristenien e chome un diskoulm : goulenn a rae an Iliz diganto ober an aluzen, reiñ o arc’hant evit ober ar vad.**

**An Iliz ivez he deze ezhomm arc’hant evit mont en-dro ; kontañ a rae neuze war an deog, anezhañ an dell war an eostoù a veze paeet gant an holl betek an Dispac’h, ha war ar c’hestoù a veze dalc’het e-kerzh an oferenn-Sul, anez ankouaat an troiadoù graet gant ar fabriked, alies betek ar bloavezhioù 1960-1970 war ar maez, evit rastellat roadoù en arc’hant pe e traezoù.**

**Moarvat eo da-geñver pardonioù, gouelioù ar sant patrom pe pirc’hirinajoù e veze roet ar muiañ en un doare espar. Gallout a raed ivez gwerzhañ dre savtaol ar pezh a veze profet da sant ar pardon, ha pa vefe amann pe lanfas lin.**

**Evit an induljañsoù, anezho distaolioù kastiz war ar pennad amzer a veze da dremen er purgator abalamour d’ar pec’hedoù a oa bet graet e-pad ar vuhez, hervez kont e oant liammet ouzh un akt a binijenn bennak, evel kemer perzh en ur pirc’hirinaj pe en ur gouel bennak just a-walc’h. Tamm-ha-tamm avat e c’halle ar fideled reiñ arc’hant da brenañ induljañsoù war-eeun koulz lavaret.**

**Goulennet he deus an Iliz ivez digant ar fideled vrokus reiñ arc’hant da sikour sevel pe kempenn he savadurioù.**

**Hiziv an deiz eo nevesaet komzoù an Iliz evit delc’her da zastum roadoù. Diwar vremañ ne laka ket ar pouez ken war ar silvidigezh er bed-hont, met war ar servij speredel ha denel a c’hall-hi degas da bep hini.**

## Sant-Erwan

War an daolenn-mañ, a oa bet livet – evit ur bennozh Doue – evit Karmezezed Montroulez gant unan eus al livourien bennañ e Frañs da vare Loeiz XIII, eo diskouezet Erwan Helori (war-dro 1250-1303) evel ur barner a iliz etre daou vreutaer. Klask a ra an den pinvidik lakaat anezhañ da gemer bravigoù, pezhioù orfeberezh hag arc’hant ; ne fell ket dezhañ asantiñ avat. An den paour, diouzh e du, a ginnig dezhañ ar sac’h ennañ pezhioù ur prosez hag ur skrid-azgoulenn da zifenn e savboent reizh. Kemer ar sac’h a ra Erwan, heñchet gant ar Spered Santel ha savet e selloù war-zu an Neñv.

Deuet e oa an tem-se war wel en Italia er 15<sup>vet</sup> kantved, met ober a reas berzh bras e Breizh, bro orin ar sant-se : un ober a drugarez eo rentañ ar justis evit Erwan ha didalvez eo ar galloud diazezet war an arc’hant er prosezioù. Er 17<sup>vet</sup> kantved avat, d’ur mare ma ne oa ken brud war an dud a lezenn nemet bezañ sot gant an arc’hant, ez eo Sant Erwan ur skouer enep. Diwar se eo bet lakaet da sant patrom gant an dud a lezenn.

## Taolenoù ar misionoù

An taolenoù-se zo skeudennoù a oa bet savet adalek ar 17<sup>vet</sup> kantved abalamour da gelenn kemennadurioù an Iliz d'ar fideled na ouient ket lenn evit an darn vrasañ anezho.

En ur rummad bet livet e-kerzh eil hanterenn an 19<sup>vet</sup> kantved (gant ar chaloni Peyron marteze) eo diskouezet ar stad a bec'hed gant div senenn :

- Lakaet o deus an diaoul hag ar seizh pec'hed kapital, skeudennet e stumm loened arouezus (ar paun evit an ourgouilh, ar boc'h evit an orged...), o c'hrabanoù war ar galon (skeudenn an ene) ; en-dro da se eo bet treset ar sioù a zeu da-heul.
- Gant an eil senenn ez eus kaoz eus ar stad a geuzidigezh : skarzhet eo ar pec'hedoù e-maez an ene gant ar Spered Santel. Da-heul an touseg, anezhañ arouez an dostoni, ez eus pezhioù aour.

En ur rummad bet livet er bloavezhioù 1930 e tiskouezer d'ar Gerneviz dre faot piv, sañset, e oa bet an enkadenn e 1929 : er c'hreiz, dirak talbenn Yalc'h Pariz, e teu un diaoul davet un arc'hantour hag un uzulier yuzev. Izeloc'h, en ifern, ec'h anavezer pennoù Marx, Hitler ur bistolenn gantañ, Stalin

### **« Dre c’hras an Iliz ho po un dornad gwir aksionoù ».**

P’o doa lañset koulzad diner an Iliz, en nevezamzer 2010, o doa adkemeret an 9 eskob eus Breizh ha Broioù al Liger kodoù ar bruderezh en un doare dinec’h : livioù flamm ha dudius, tresoù mod discount. Gouzout a raent mat e fell d’an Iliz « diskouez ez eo disheñvel diouzh kevredigezh ar beveziñ m’eo aloubet ar speredoù gant an arc’hant », se zo kaoz o doa diheñchet ar c’hemennad pennañ « bezit pinvidik » evit embann, er c’hontrol, ar vertuz a vez roet d’ar gristenien : reiñ.

E 2009 ez ae ar roadennoù d’ober 43% eus budjed eskopti Roazhon.

N’eus ket bet par d’ar pezh mell koulzad-se sevenet gant un ajañs kehentiñ eus Roazhon : lakaet e voe 600 panell skritellaouiñ a vent vras, hag en 9 eskopti e voe moulet 2 900 skritell ha 2 vilion a draktoù, ha skignet e voe 540 bomm bruderezh er radioioù.

Lusket ez eus bet ur c’houlzad nevez da vrudañ diner an Iliz e 2011 hag a laka ar pouez war ar « gwir oberoù » hag ul lugan « Abalamour ma ro-hi dizamant, e roan-me d’an Iliz ».

## **Reiñ arc'hant da sevel un iliz**

Evit lakaat iliz Sant-Albin, a zo e plasenn Santez-Anna, da vezañ ar santual doare gotek a vanke e Roazhon, e krogas ar barrez, adalek 1873, da sevel arc'hant diwar skouer ar c'hevelaiñ greantel dre « gevrannoù ». Krouet e voe kevrannoù hag a dalveze pep a dri-c'hant lur. Goude-se, e 1890, e c'houlennas ar person sikour adarre digant « Servijourien Mari » evit klask dastum 600 000 lur digant 600 isskridour hag a brometas reiñ 100 lur ar bloaz e-pad 10 vloaz. Diwar neuze e voe roet pep a ziplom Gwarant Mari dezho. Ar gwir o doe da gaout un toullad grasoù kaer da-heul : selaou an oferenn ouzh aoter ar C'heloù-Mat bep sizhun, lakaat skrivañ o anv war blakennoù marbr...

Ar c'holonnennoù, ar rozennoù hag ar pilerioù treset war an diplom zo ivez un drevezadur eus ar Grennamzer. Stag eo diazez speredel ar santual-se ouzh istor ar c'harter : ennañ e kaver kloz kouent ar Jakobined, an ex-voto profet gant an dud na oant ket bet lazhet gant tan-gwall meur ar gêr e 1720, ar relegouer, iliz kozh Sant-Albin hag Itron-Varia ar C'heloù-Mat a vez azeulet.

Koulskoude, e 1904, war-lerc'h an iliz treset gant Martenot hag al labourioù adkemeret gant Le Ray, e chomas ur chanter diechu e plasenn Santez-Anna.



## **Aluzen, profadennoù...**

Dont a rae budjed kement parrez a oa diwar leve an douaroù hag ar savadurioù da gentañ-penn, mat ivez diwar ar profadennoù. Meur a seurt a oa, e traezoù pe en arc’hant. Dastumet e veze ar re arc’hant-se d’ar Sul, da-geñver ar gest, « kutuilh gant an tas » evel ma lavared, pe er c’hefioù lakaet en ilizoù. Ne oa ket uhel pep roadenn, met kalz anezho a veze.

Moarvat eo da-geñver pardonioù, gouelioù ar sant patrom pe pirc’hirinajoù e veze roet ar muiañ en un doare espar gant an dud “a gase un ofrant”. Gallout a raed ivez, diouzhtu goude, gwerzhañ dre sav-taol ar pezh a veze profet da sant ar pardon, ha pa vefe amann pe lanfas lin. Da-geñver Troveni Lokorn e 1929, e voe gwelet c’hoazh, ha filmet kement hag ober gant filmaozerien Dielloù ar voull-douar (Albert Kahn) a oa eno, e veze graet profadennoù dirak kement baradoz\* a oa war an hent.

\*Ur baradoz zo un aoter a vez savet war hent ur brosesion.

## **Induljañsoù chapel Koadri – panell goad livet - 1830 Skaer**

Gwelet e voe induljañsoù evit ar wech kentañ e Roma en 11vet kantved hag e Breizh e penn kentañ ar 14vet kantved. Hervez ar relijion gatolik e vez lamet ar pec'hedoù kuit gant sakramant an distaol (kofesaat). Ne vez ket lamet gant ar sakramant-se ar c'hastiz temporal avat : ar purgator. Gallout a raed lakaat digreskiñ pe lemel ar c'hastiz-se gant an induljañsoù, a veze roet gant an dud a iliz d'ar fideled. Graet e veze plenier pe darnel eus an induljañsoù, diouzh ma veze lamet ganto a-zarn pe penn-da-benn ar c'hastiz temporal dleet evit ur pec'hed bennak.

E chapel Koadri eo deiz Pardon ar Sakramant an Aoter, da drede sulvezh miz Mezheven, a veze dibabet gant ar birc'hirined evit gounit induljañsoù plenier. Sikour a raent kalz neuze ar seurt gouelioù-se d'ober berzh.

Er bloavezhioù 1550 e voe kavet abeg er marc'had-se gant al luterianed. Dav eo lavaret e veze prometet gant an Iliz, a ranke adsevel savadurioù relijiel a oa bet diskaret da-geñver ar brezelioù hêrezh, reiñ induljañsoù en eskemm ouzh arc'hant. An doare gwellañ da resev roadennoù ! Berzh bras a rae ar mod-se d'ober. Er 16vet kantved e tihanas an Adsav Katolik gant kement liamm eeun a oa gant an arc'hant war an dachenn-se.

Darbet eo d'ar banell induljañsoù-mañ, fall a-walc'h he stad, mont da get ! Saveteet hag adreset eo bet gant kevredigezh tud a-youl vat chapel Koadri. Un testeni eo eus boazamantoù zo hag a oa padet betek penn kentañ an 20vet kantved hag eus implij ar brezhoneg – ha pa vefe un asez « brezhoneg beleg » disheñvel a-walc'h diouzh brezhoneg Kerne tud Skaer.

## **8 – Klozadur**

## **Ar Vigoudenned, tud tost ?**

Farsadennoù a-leizh zo diwar-benn tud Leon ha re ar Vro Vigoudenn a vefe pizh, a-hervez.

Nevez a-walc'h int avat, ha nevez-« savet » zoken. Degas a reont da soñj, daoust da se, eur tremenet e Bro-Leon koulz hag er Vro Vigoudenn eus stad ar baourentez (er bloavezhioù 1930) d'an aezamant e-korf un nebeud bloavezhioù anez na vefe bet kollet ar boazioù kozh.

Tostoc'h ouzh tro-spered an dud eo ar bommoù lemm, lampon pe amzere a reer ganto evit komz eus an arc'hant war ar pemdez.

**Diell klewelet.** Danevelloù-buhez dastumet gant Patrice Goyat, ambulañser e Douarnenez, e-barzh lec'h kloz e ambulañs.

## **Lakaat a ra Breizh gwerzhañ produioù bank**

Kustum eo marketing an tiez bank da fougéal an tommder ouzh ur rannvro evit dedennañ pratikoù.

E 1980 dija e reas Kef Kengred Breizh ul liamm etre bezañ un embregerezh modern hag oberiant evit ar vro, ha skeudenn Breizh hec'h-unan, gant ul lugan daou ster dezhañ : « Breizh er penn a-raok ». E 1982 e roas an tu da gaout chekennoù brezhonek, ar pezh a vez implijet gant 7 000 a bratikoù en deiz a hiziv.

Tregont vloaz war-lerc'h eo Kef al labour-douar a embann diouzh e du kas oberoù da benn er rannvro. Embann a reas skritelloù warno kartennoù-keveler fichet gant banniel Breizh hag ul lugan da c'houlenn digant an dud isskridañ evit bezañ « talvoudus » evit o rannvro. E 2010 en deus krouet ivez un ajañs « nested », Breizh-Banque.com hec'h anv, evit ar Vretoned n'emaint ket o chom er vro.

## **Ar vrokusted**

Gant ar « garitez business » e vez goulennet bremañ digant an dud, en un doare foran dre ar mediaoù, bezañ brokus ; e 2009 e voe prometet gant ar sellerien, e-kerzh un dibenn-sizhun, reiñ 84 milion a euroioù d'an Téléthon, a zo gantañ kement tra a vez ezhomm d'ober berzh er skinwel (ar c'hleñved, ar vugale, an direizhder, tud brudet e-barzh ar jeu), tra ma oa aet 19,5 milion a euroioù gant ar Sidaction ha 62,3 gant ar Restos du Cœur.

Bez' ez eus ivez avat eus ur vrokusted kozh na ne ra ket kement a drouz : ar saveteiñ-mor. Embann a rae an aozadur « Ospitalerien saveteerien Breizh » (1893-1967) bezañ breizhat ha katolik. E Kevredad broadel ar saveteiñ-mor (SNSM), a zo anezhañ abaoe 1967, ez eus bodet 3 500 saveteer pad a-youl vat e-barzh 232 greizenn, ganto 171 bag. War an 10 milion a euroioù a ya d'ober e vudjed bep bloaz e teu 65% diwar roadennoù, legadoù ha skodennoù.

## **Breizh hep moneiz**

10 pe 15 vloaz zo emeur oc'h esaeañ, e Breizh, ober gant ar moneiz « a dalvoudegezh sokial » evit skoazellañ an armerzh lec'hel hag an eskemm servijoù, hep arc'hant : ar REL (reizhioù eskemmoù lec'hel). Kinnig a ra an izili o barregezh hag o amzer (keginañ, labourat el liorzhoù pe gant an urzhiaterezh, prestañ ostilhoù, gwriat...) hep paeamant ebet, met gant unanennoù kontañ evel al « lapous », ar « vleunienn », ar greun ed pe holen, an amzer...

**Diell klewelet.** Skouer ar gevredigezh REL eus Sant-Maloù krouet e 1995

**Gweladennerourion ker,**

**Setu, echu eo ar weladenn e brezhoneg  
ganeoc’h!**

**Mard oc’h bet plijet gant an  
diskouezadeg-mañ, skrivit ur gerig  
deomp!**

**Goulennit gant an degemer ur feurmskrid  
ha leunit anezhañ e brezhoneg!**

**marplij ganeoc’h!**

**Araok mont kuit, lakait al levrig-se e-barzh e vouest dezhañ  
lec’hiet e dibenn an diskouezadeg.**

**Bep sizhun ez a kuit lod eus ar skouerennoù-se gant  
gweladennerien zo, ha n’on ket evit adober kantadoù  
anezhe! Ha neuze, mard oc’h dedennet gant an droidigezh-  
mañ e c’hellit pellgargañ anezhi war lec’hienn mirdi Breizh  
war ar genrouedad! Klikit war ar Gwenn ha Du hag e teuio  
war-wel ar bajenn penn da benn e brezhoneg!**



**Kenavo deoc'h ha betek an distro e mirdi  
Breizh!**